

" KLEMMGAN AR BRIZONERIEK."

(War dôn: "Da Paimpolaise.")

I

Daoust ha kavet e ve c'hoaz er bed,
 Tud truézuz, gant kalon acur,
 A garfe trei o zell, o spéred,
 War-zu ar Brizoneriek baour?
 O ! mar be kavet,
 E tleont klevet
 Ar c'halvaden a deu d'ê ac'han,
 Bro estren, elec'h m'édomp stag,
 Elec'h m'a hirvoudomp hep ehan,
 Ha ni ken poaniet ha divag!

II

Aboué devez-c'houerv an Distalac'h,
 Devez a nêc'hamant, a spont;
 A bep tu d'imp tân ha drailh ha lac'h
 Na ouimp ziouazi pelec'h mont...!!
 Raket e camp holl.
 Ha ganimp ar c'holl!
 Dastumet krekerent a vagadou,
 Ha kaset da vro an trec'hour;
 Gwech war droad, gwechall a drêniadou
 Chatal hep difenna zikour.

III

Setu eun daou vloavez tremenet
 M'édomp er boan, en diênez;
 Hon c'halon glac'haret ha rannet
 Gant aon rak gwa-soc'h, rak kernez!
 En hon bro, hep mar!,
 Den ebet ne oar
 Netra eo dougen kêf goulloster
 Ha naon kri hep gwelet bara
 Sonjal n'eus ket a vevans hanter,
 Ret kerzet ha laret netra...

IV

Hag e kasomp hon galvadennou,
 D'ac'h kenvroiz, kerent karet;
 Chilaouet, mar plij, hon fedennou,
 Dre drugare, hon zikouret!
 Karout a c'hanoc'h
 Ha sonjal ennoc'h
 Holl aman a réomp an dra-ze,
 C'houi a zo bepred dirazomp;
 Skanvoc'h kalz eo hon bec'h evelse,
 Ha gwelloc'h en em gennerzomp.

V

Goulen a réomp an aluzenn
 Diganac'h Tad, diganac'h Mamm,
 Aman, ez eo garo al lézenn,
 Aman eo pouner mat ar zamm;
 Pegoulz an distro,
 D'ho kavout er vro?
 O! nag e vefomp c'hoaz evuruz
 O welet ti ha parkeier;
 C'houi o vriata, start ha karuz,
 Ho mab, ar, paourkez Prizonier!

VI

C'houi, hon grwage, chomet hoc'h unan,
 En kreiz streuvel, gant ken gwa stal;
 Sonjal ennoc'h eo hon gwasan poan,
 Ya, an dra-ze a ra d'imp jal..
 Hag hon c'harante
 Bruzinet bemde!
 N'ankouaomp ket devez an eured,
 Du-hont en hon bro, Breiz-Izel;
 Touet ganimp ho karout & bepred
 Ha bezan ho harp, ho skoazel...

VII

Ha c'houi, merc'hed yaouank, ken lirzin
 A valéemp er pardonioù;
 Dalc'hmat seder, dalc'hmat o c'hoarzin
 Hag o vouskanar d'imp zoniou;
 Hunvre o tiwan,
 Distérik ha gwan...
 Kalonou bet, goude, diframmet
 Stlapet pell an eil diouz eben;
 Anenvor hepken a zo chomet
 Da skanvaat ennomp an anken.

VIII

Hag e c'houlennomp start diganac'h,
 Ouz hon dilez, kemer true;
 Roet evidomp, ha hep dinac'h,
 Roet frank, en hano Doué!
 Eun tamm euz ho perz
 Hon laka ken serz!
 Nag e triomp, an eil égile,
 Pa zigouez "Koli" pe baKad;
 Stad vras ennomp, evel bugale,
 Hag an dour en hon daoulagad....

XI

Neuze, p'en em gavfomp war hon c'hiz,
 Pebez joa, pebez levenez;
 Diwarnomp holl, kerent, kehvroiz,
 Troet ar walen, an hirnez,
 Warlerc'h an dizoc'h
 Buhe gompezoc'h,
 Poan ebet, a gement a gonto,
 Evidomp ken war an douar;
 Hag ennomp, evidoc'h a bado
 Dalc'hmat eur garante giswar...

IX

Roet eta, roet kalonek,
 Evit ho tud, Prizonerien,
 Gouzout a ret ez int ezommek
 Paour evel neus ket a baourien:
 Na boued, na diskwiz,
 Na peuc'h na frankiz.
 O buhe, eur vuhe a sklavour,
 Terval-zac'h evel an noz du;
 Henvel-beo ez int ouz eur c'hlanvour,
 O klask ar yec'hed a bep tu.

X

Ar yec'hed a deuo d'e vare,
 Eno eman hon fizianz-ni;
 Dont a raio da wir hon hunvre,
 Mouget e vo ar velkoni...
 Pa dec'hfomp ac'han,
 O kaerât de gân!
 Kan ar c'hlanvour adkavet yec'hed,
 Kan ar Prizonier dichadenn;
 Kan an dizamm, an evurusted,
 Ouz e heul, meur a youc'hadenn!

Ar Yeodet.

Sant-Servez, 6 a Wengolo 1942

(Pep gwir miret striz.)